

NAVET EVIT EN EM BREPARI

D'AR

PEDENNOU PUBLIK

GOULENNET GANT AN ASSAMBLE NASIONAL

OTRE ROET GANTANN AOTROU'N ESKOP KEMPER

A galon vad a roan ann otre da veza mouliet ha kaset da redek enn hon eskopti ar pedennou-man.

Ar bedenn a zo hon nerz hag hor souten. Kredi a rann n'eo bet biskoaz necesseroc'h.

† D. ANSELME,

O. S. B.

Eskop Kemper ha Leon.

EMGLEO EUZ A ITRON-VARIA A SILVIDIGEZ

Ar Frans e deus pec'het ha meritet ar goallou zo couezet varnhi. Evit he zavetei eo red e teufe he guir bugale da bidi evithi, da c'houzanv evithi, da ober pinijen evithi. Dre ho fedennou ha dre ho felerinachou o deuz, abaoe bloas, tennet grasou hag a zo souezus meurbet; mes ar pezh o deuz da ober ne ket echu; red eo dezho kendelc'her da ziskuez ho feiz ha d'en em sacrifia. Ra deuent d'en

em unani gant ho Deputeed, ha da brepari an Env da rei ho goulenn d'ar pedennou publik. oc'h ober eun *navet a breparation hag a binijen*.

ALIOU DA HEULIA EVIT AN NAVET-ZE

1° An naved a zigoro d'ar Sadorn, deis kenta a vis Du, hag a echuo d'ar Sul 9 ;

2° Ar Guener 7 eus ar miz, a vezo eun devez iun. — Ar re ne c'helfent ket iun a c'hell ober, eleac'h ar iun, eur binijen pe eun ober mad all, evel hent ar groaz pe eun aluzen evit an œuvr mad-ma ;

3° Ar Gommunion general a dle beza d'ar Sul 9 ;

4° Ma teu an Aotronez Eskibien da c'hourc'hemen pedennou evit en em brepari, e vezo heuillet gant prez ar pezo a vezo gourc'hemennet ;

5° Ar re zo en emgleo-ma, a ielo da gaout ar bersoned hag ar veleien a anavezont, hag ive d'ar c'houenchou, evit lakat ober, mar galler, an naved e publik ;

6° Bemdez, epad an naved, ar re zo en emgleo a lavaro, unanet a speret hag a galon, ar *Veni, Creator*, litanioù ar *Verc'hes*, teir guech ar *Parce, Domine*, ha neuze ar pedennou-gou-ma :

Calon sacr a Jesus, *o pet truez oc'h ar Frans.*

Itron-Varia a silvidigez, *pedit evit ar Frans.*

Sant Mikeal Arc'hæl, —

Sant Joseph, —

Sant Per ha sant Paul. —

Sant Martin, —

Goude-ze an amand honorabl-ma :

O Jesus, hor Zalver, gant eur galon mantret hag an daelou euz a eur guir c'hlac'har. e teuomp

d'en em deleur d'ho treid, ha da ober deoc'h amand evit ar c'henalies a vech ma zoc'h bet an-counac'het, evit an oll geier, an oll blasfemoù, an ell sacrilachou dre bere oc'h bet laket er meaz euz a lezennou hag eus a gustumou ar vro. Pardon a c'houlennomp ouzoc'h dreist pep tra, euz ar pec'hejou cometet dirag an oll, euz ar goall skuer roet o profani ar zul, o terri ho courc'hemennou hac o tisprijout hoc'h Aviel santel. Hon torfejou zo kiriek d'hon reuziou; meritet mad hon euz ar vez a zo coezet varnomp; hogen fizians hon eus enhoc'h, o Jesus. C'hui eo hor Zalver, o pet truez ouzomp, o pet truez oc'h ho vikel, torrit he chadennou, mirit-hen d'hoc'h Iliz a zo ker goal gaset, ha roit d'ezhan ar c'hras da velet an ilis santel-ze a caout ar gounit. O pet truez oc'h ar Frans cablus; taolit varnezhi eur zell a drugarez hag a garantez; grit d'ezhi distrei ouzoc'h ha saveteit-hi.

O Mari, hor mam, bezit hor silvidigez; na rit mui pelloc'h ar scouarn-vouzar oc'h pedennou ha daeloc'h ho pugale. Pedit evidomp, bezit hon difennourez e kenver ho map divin, dalc'hit he vreak'h prest d'hor skei, o pet sonch ez oc'h rouanez a Frans, ha saveteit ho rouantelez.

Evelse bezet great.

7° Ma ve great an naved gant solanite, a c'halfet, goude ar venediction pe ar pedennou all, cana Cantik Itron-Varia ar silvidigez;

8° Ouspen ar pezh on eus merket, an eneou devot a c'helfe ober eur *veditation*, pe eun orezon a galon. Caout a rafent peadra da vedita en *Imitation Jesus-Christ*, pe, ar pezh a ve guelloc'h c'hoas, kemeret an navet meditationou savet evit an naved-ma, hag a gaver e levrik-dorn pe MANUEL ar pelerinachou, e ti Haton, ru Bonapart, 33, e Paris.

An naved-ze zo, a vrema, bet aprouvet gant eun niver
braz euz an aotronez hon eskibien, ha discleriet o deuz o
devoa soñch da alia tud ho escoptiou d'he heuilla.

Induljansou

HON Tad santel ar Pap, dre eur scrit euz ar
c'henta a viz Here, en deus teurvezet rei, da ge-
ment hini a rai an naved-ma, TRI C'HANT devez a
induljansou evit pep devez euz an navet, hag eun
induljans leun evit an deiz diveza, deiz ar Gom-
munion.

Nep en defe c'hoant da c'houzout hirroc'h divar
benn an naved-ma, n'en defe nemet scrifa da
vureo Emgleo Itron Varia ar Silvidigez, ru
Francez Kenta, 8, e Paris. (E gallek, bureau de
l'Association de Notre-Dame de Salut, rue Fran-
çois I^{er}, 8, à Paris.)

OTRE DA VOULLA :

† C.-A., Arc'hescop Bourj.